

Prizioù lennegel Unvaniezh Skrivagnerien Breizh

e Brezhoneg


D'ar sadorn 4 a viz Here eo bet embannet ar prizioù 2020 e Begerel, da geñver Emvod Meur an USB/AEB. Izili ar Juri a oa Evelyne Pernel, prezidantez, Annie Coz, Thierry Châtel ha Michel Priziac evel Prezidant an Unvaniezh.

Priz Pêr-Jakez Helias 2020

Degemeret hon eus 6 levr ar bloaz-mañ


Beuzet diwar ar pont bras

skrivet gant Yann-Fulub Dupuy (embannet gant An Alarc'h)




Chuchumuchu

skrivet gant Erwan Hupel (Embannet gant Al Liamm)




Diougant ar seizh sant

skrivet gant Yann Bijer (Embannet gant Al Liamm)




Dre fact Fauré

skrivet gant Yann Gerven (Embannet gant Al Liamm)



Koroll an dasorc'h ha danevelloù all

skrivet gant Fulup Lannuzel (Embannet gant Al Liamm)



Malo, ar soner violoñs skrivet

gant Goulc'han Kervella (embannet gant Al Lanv)



Levrioù bet meneget :

«Koroll an Dasorc'h ha danevelloù all»

«Dre faot Fauré »

«Malo ar soner violoñs

Ar priz kentañ a zo bet roet da **Fulup Lannuzel** evit e zastumadenn danevelloù.

«Koroll an Dasorc'h ha danevelloù all»



Ali ar Juri

Nav danevell, peurlipet, a zo en dastumad « Koroll an dasorc'h ». Urzhiet int hervez red an amzer eus an XVIIIvet kantved betek ar bloavezh 2027 !

Al lennerien a gejo gant harozed wirion, mesket gant tudennoù bet ijinet, hag a advev darvoudoù displeget brav ha pizh gant pluenn faltaziek an aozer.

Poltrejoù brav a zo deskrivet gantañ : ar roue Stevan o tiouganiñ pignet war ur wezenn, Anna ar C'hoad ken cheuc'h en he dilhad paourez ! Taolennet dispar e vez ar maezioù hag an aodoù.

En ur bed kevrinus e vezer splujet gant plijadur.

Dizoloet e vo istor kêr Vrest e-pad ar brezel diwezhañ) E « Brest sezizet » eo kontet spis pegen kalonek e oa an dud an difenn enepbombez,

Desket e vez elfennoù istorel a-bouez, an dismegañs ouzh ar re zu en arme ar Stadoù-Unanet, ha penaos e oa bet ebarzh ar sonerezh jazz e Breizh !

Pegen fromus eo istor « an daou vreur ».

Savadurioù kêr Vrest (ar fungarr da skouer) ha buhez an embregerezhioù a sav anezho a zo deskrivet mat.

En danevell gouestlet d'un « dornskrid kopt » e tizoloer peseurt heligentañ e c'hall bezañ etre daou imbourc'her bras !

Bed an arzourien (al livourien, ar c'hizellerien), danevellet gant ampartiz ha fent, a blijjo d'ar Yann-lenner. Dizoloet e vez micherioù na vezont ket deskrivet gwall alies el lennegezh

(teknisianed, tisavourien...).

Spered Roparzh Hemon ha Gwalarn a hadvev e ijin ha yezh (arnevez ha kaer) Fulup Lannuzel.

Gerioù brav a vez desket. Bommoù gwenedek a vez tanvaet memes !

Ur ster don a c'haller kavout e pep testenn. Souezhus eo bewech dibenn an troioù-kaer !

Klokaet e vez pep danevell gant displegadenoù dedennus evit o c'hompren gwelloc'h (perzhioù ar mare, un diverrañ eus buhez an dud vrudet bet meneget. ur geriaoueg...).

Etre hon daouarn eo kinniget ur seurt koufr paper ennañ un oberenn-vuhez (testenoù bet embannet a-raok er gelaouenn Al Liamm hag avañturioù nevez !

Ul levr pouezus e vo e-barzh hol lennegezh, da vezañ kinniget d'al liseidi, d'ar rummadoù da zont !

An eile Loread zo Yann Gerven evit ar romant polis **Dre faot Fauré.**

<p>N'eus nemet ar sonerezh e buhez Hervé Volant, soner yaouank violoñsell anezhañ hag eñ o reiñ kentelioù e skol-vuzik Kemper. Ha renket evel ur skrid-sonerezh eo e vuhez. Betek ma vo klask war-lerc'h Eos Dauvergne, deskardez dezhañ.</p> <p>Mont a raio ar c'homandant Lionel Turluch a souezhadenn da souezhadenn betek an</p>	<p style="text-align: center;">Ali ar jury</p> <p><i>Ul levr tev, danvez fetis, stank, ha blazet mat, da leuniañ sac'h-boued-lennegel ar Yann-lenner !</i></p> <p>Ur romant-polis eo met kalz muioc'h eget ur « polar » boutin ! Ur steuenn ijinus displeget mat, en ur depegn ar gevredigezh a-vremañ, e Breizh, en amzer festival an Erer-kozh, gant roudoù eus ar vuhez hengounel ! Dizoleiñ a reer bed ar sonerien klasel, bed ar sonerien yaouank-tre sot gant ar sonerezh-se.</p> <p>Donezonet eo Yann Gerven, c'hwi 'oar, da depegn birvilh ar grennarded.</p> <p>Tro-dro d'ar c'hentelioù-sonerezh prevez e tizoloer</p>
--	---

**disoc'h, ma welo e c'hell an
afer-se diskouez splann
tuoù duañ Mab-den.**

santadoù ar re a zesk, re ar c'helenner, met
santadoù mammoù an deskidi ivez ! Splujet e vezer
e klasad ar vourc'hizien sioù ar re binvik ganto !

Er burev-polis ec'h adkaver kudennoù ar
gevredigezh, an dram, ar feulster, an emlazh, tud
steuziet...

A-hed ar romant e vez hadet munudoù hag a sikour
al lenner da zivinout, d'ober goulakadennoù.

Paket e vezer gant meur a souezhenn a-hed an istor.
E fin al levr zoken e vezer surprenet !

E korf al levr e vez kemmesket brezhoneg modern
(ha pinvik) gant brezhoneg poblek saourus.

Er plegennoù skrijusañ zoken ez eus un tamm mat a
vousfent ouzhpenn, ha c'hoarioù-gerioù !

"Derc'hent-dec'h e oa bet brevet war ar rod ur soner violoñs. Tamallet e oa bet outañ bezañ kroget gant an dañs ha preizherezh ar parper timbr. Divempret eo bet goude ar marv ha staget pep tamm eus e gorf e pevar c'horn kêr Roazhon". Diwar an darvoud gwirion-se, kontet gant ar varkizez a Sevigne, en deus Goulc'han Kervella ijinet istor Malo ar soner violoñs. E dibenn miz Here 1675 e oa...

Ali ar jury

Malo, soner violoñs yaouank, a gemer perzh e taolioù dispac'h Roazhon, e 1675. Stourm a ra Pobl Vreizh a-enep tailhoù nevez ar roue Loeiz ar Pevarzekvet war ar paper timbr, al listri staen hag ar butun.

Emgannoù a c'hoarvez etre ar re jentil, hon harozed, hag ar re a zo drouk... Feulster arme Koedlogon ha de Chaulnes a zo dispaket sklaer.

Ur seurt Robin-koad e violoñs, eo Malo.

Al levr a zo bet savet diwar un anaout gouiziel eus istor Breizh, a vo treuzkaset d'ar grennarded yaouank, hep santout e vezint o teskiñ, douget gant lusk romantel an dudenoù un tamm koshoc'h evite, harozed yaouank-flamm o tizoleiñ ar vuhez. Kejadennoù a lak an istor da vont war-raok ha fonnus.

Talvoudus eo an depegn eus micherioù ar seitekvet kantvet ha boazioù ar werin :

kannerezed, kivijerien, ul lennerez-pladennoù, ar glaskerien-vara, pouez ar relijion...

Tud deuet a gavo dudi ivez e lenn al levrig-se rak meneget e vez resis darnoù istor Breizh.

Dedennus eo gwelet e veze kaset ar c'heleier buan a-walc'h d'ar bobl vunut gant ar varc'hadourien.

Titouroù a vez roet war implij ar yezhoù, brezhoneg ha galleg, hervez ar broioù.

Al levr-mañ a zo un heuilhadenn d'ar pezh-'hoari « Ar Bonedoù ruz ».

